


ESKOPTI KEMPER ha LEON



KENVREURIEZ
ar
BREZONEG

K A I E R 20

° Feseurd Brezoneg 'zo ganeom...?	90
° Sul ar bleunioù hag ar Basion.....	91
° Eil Sul Fask A.....	105
° Trede Sul Fask A.....	107
° Pevare Sul Fask A.....	110
° Tonioù nevez evid an Overenn.....	112
° Overenn Sant Erwan, Diwaller Breiz.....	113
° Eur hantik: Jezuz 'zo diskennet.....	117

Troidigezioù aotreet, da arnod, evid an Eskopti,
 aberz an Aotrou F.BARBU, Eskob Kemper ha Leon.
 Kemper, d'ar 5 a viz c'hwevrer 1972.

+ Visant Fave, eskob-skoazeller

Komanantit da Gaierou " KENVREURIEZ AR BREZONEG (15 lur)

Aotrou Job Seite - 29 N. Guissény - C.C.P. 1738-66 RENNES

Ar re o defe hoant kaoud KAIEROU bet embannet abaoe ar penn kenta,
 o goulenñ digand Job Seite, Skol an Aod Cwiseni (bro-Leon)

ESEURD BREZONEG ZO GANEOM...?

setu amañ eun ali....

Iaro eo Per-Yann, tost da eiz miz 'zo bremañ. E niverenn Miz Du 1971, ILIZ HA
asker gouzoud piou a gemero e blas e Eskopti Kemper. Deuet eo ar respont
17 KENVREURIEZ AR BREZONEG: bez ema an Aotrou n'Eskob V. FAVE, e penn eur
tud oh ober wardro an troidigeziou, wardro ar zonêrêz ive : setu amañ,
1, eun nebeud anoiou: F. Elard, Job Seite, R. Abjean, A. Seznec, M. Scouarnec, F.
Irien, F. Mevellec, hemañ kirieg kentoh euz an overennou er Radio hag en Tele.
eur gaer a zislavar d'ar bomm latin "Vae soli !" (gwaz-a-ze d'an den a jom

fond a ra na troidigeziou en-dro: dond a ra braoig er-mêz ar haierou, eur
dezo, brasoh ha kaeroh, med a-wechou stank a-walh enno ar faziou-moullêrêz:
neus e vo gwellaet an traou heb dale.

Eun tammig keuz evelato am-eus da droidegeziou Per-Yann, pa zell an ouz troi-
'zo, zoken ouz ar re a gaver er Haierou deuet er-mêz, abaoe m'eo eet Per-Yann
Bez e oa Pgand Per-Yann eur yez eeun, blaz mad ganti bepred, saouruz daoust
ez uhel ha santel... Lod a lavar (hag a skri-) e oa troidigeziou Per-Yann
k ha gwannaet e-keñver an destenn hregaj. E gwirionez, n'eo ket bet grêt e
iou gand Per-Yann ger evid ger, med koulskoude ne oa ket eun den da wannaad
b gouzoud dezañ an destenn zantel: bez e oa anezañ - Doue d'e bardono ! eur
a Iliz, gwriziennet mad ha don e Hengoun an Iliz, heb beza warlerhiet na ki-
m ebed, med bez e oa anezañ ive eur brezoneger ampart, euz an amparta d'am
ouspenn, ne felle ket dezañ ober gand eur yez re uhel, dre zoujañs evid ar
rien evel m'emañ: Per-Yann a oa eun den tost-tre ouz an dud vunud, ouz ar
rezonegerien e don o halon, o veza m'eo ar brezoneg yez kenta o buhez, yez o
ito dreist oll e-noa Per-Yann greet e droidigeziou: fellout a ree dezañ rei
d'ar re-ze ive pinvidigez ha skoazell komzou beo an Aotrou Doue; chom a ree
tost (hag a-ratoz d'am meno) ouz geriadur hag ouz stummou-lavar ar Hatekiz
koz. Koz ? Paz kement-se : an dud ganet ha savet war ar maez e Breiz-Izel,
Hatekiz araog 1947, a zo bet avielet, ya avielet, e brezoneg, gand eur yez
marteze dister a-wechou ha gallekaet, a lavaro lod, med e peb yez, d'ar mare-
euzeudig an traou war ar poent-mañ. Arabad eta ober gand eur yez a-uz da ben-
red an dud: kement-mañ eo ar penn kenta evid n'eus forz peseurd kelenour.
ez re hlan a hell mond beteg beza eur yez estren evid ar re a zo boazet ouz
ur-mañ-geriadur; eur brezoneg, re a heriou nevez, dianav ennañ, a zo gwasoh,
vrezonegerien voutin (ne lavaran ket evid ar vrezonegerien desket) eged ar
e.... ar galleg ! Arabad sevel eur yez evid eun toulladig tud dibabet hebken.
il gwech emskianteg: gand strolladou distank ne reer ket eur bobl. Ar re-ze.
o-deus gwiriou ive, ha marteze etrezo, e hellont beza kizidig-kenañ, med en
u tud a beb leh, a beb tu, tud izel ha pennou braz, juloded ha tud keiz...
g eo red kaoud eur yez kempouezet, tostig mad ouz ar re vihanha: p'eo digor
d'ar re baour, ez eo-hi digor d'an oll.

F. MORVANNOU

meurz 1972

ur minhoarz... Ar mouler, tamm ebed eur bizskriver anezañ, a ra, gwir eo, ur
lou fall er stensilou... med evelato, ne fell ket dezañ samma an oll behejou.

AL LID penn-da-benn diwar
"Missale Romanum"

En deiz-mañ eo bet antreet Mab an dén e kêr Jeruzalem, evid seveni Mister e sk(da lavared eo, e varo hag e adsao da veo). Rag-se, en oll overennou, e tleer gas da zoñj euz an donedigez-se: araog an overenn vrasa, gand ar brosesion pe nd an antre solanel; en overennou all, gand an antre plên. Evelato, en overennou l-se, ma vez eun niver braz a dud, e heller ober c'hoaz un antre solanel, med brosesion ne vo ket grête eun eil gwech.

A) AL LID GAND PROSESION

Erru an eur, eh en em gav an dud el leh merket, en diavêz d'an iliz, bodoù palmez, uz pe lore, en o daouarn.

Ar beleg, gand ar re 'zo ouz e zervicha, a zigouez éno ive, gwisket evid an overenn gand dillad liou ruz.

Da zigeri al lid, e kaner an antivonenn-mañ, pe ur han all:

Hozanna 'vid Mab David ! Benniget an hini a zeu én ano Doue !

Roue Israel eo ! Hozanna e barr an neñvou !

Salud ar beleg d'ar bobl, ha kekentelig diwarbenn ar gouel, evel hénn pe demheñvel:

Va breudeur kêr, epad ar Horaiz-mañ, on eus renezet or halonou, dre ar bedenn, ar binijenn hag an oberou a garantez. Emaon amañ hirio, unanet gand an iliz a-bez, evid digeri ar zizun zantel, a lidom enni Mister Braz Pask Or Zalver.

Araog peurechui ar mister-se euz or zilvidigez, o vervel war ar groaz hag o sevel beo euz ar béz, Or Zalver a zo bet antreet gand lid braz, e kêr Jeruzalem. An donedigez-se a lidom bremañ adarre, evel beb bloaz. Gand feiz ha gand gwir garantez, ni a gerzo da heul Jezuz Krist: unanet gantañ en e varo, e kavim on lod ivez en e adsao da veo hag en e vuez nevez.

Ar bedenn war ar bobl a lavar goudeze, unan eus an diou-mañ:

a) Pedem Doue ! Doue oll-halloudeg ha peurbadel, plijet ganeoh + benniga ar bodoù hag ar skourrou-mañ; goude m'on-no kerzet laouen da heul Jezuz Krist, Or Roue, grit deom mond gantañ beteg Jeruzalem ar Baradoz.
Eñ on Doue Beo ha leun a hloar, a oll viskoaz da virviken. AMEN !

b) Pdeom Doue ! Lakit da greski, Aotrou Doue, feiz an dud a esper ennoh, ha selaouit en ho madelez ar pedennou a reont a wir galon:
ni hag a zo hirio o tougen palmez ha bodoù lore en enor d'Or Zalver, grit deom digas deoh frouez on oberou mad, o chom unanet gantañ bepred.
Eñ on Doue beo ha leun a hloar, a oll-viskoaz da virviken. AMEN

Neuze e lenner Aviel an donedigez da Jeruzalem, amañ hini ar bloavez A

Jezuz, o tond, da Jeruzalem, gand prez ha gand levez vraz, a zo eur skeudenn euz e zistro leun a hloar. Eun dervez, ma plij gand Doue, ez aim d' e heul da gêr Jeruzalem an Neñv.

VIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE (2I/I-I)

Jezuz hag e ziskibien a zo dija tost da Jeruzalem.

Erruet e Betfage, war menez an Olived,

e kas Jezuz daou euz e ziskibien, en eur lavared dezo:

d'ar vorhadenn a zo dirazoh;c'hwi a gavo dioustu
eun azenez ouz ar stag ha ganti eun azenig;
dsitagit anezo hag o digasit din.

Ma vez lavaret eun dra bennag dech,respontit:

- "An Aotrou e-neus ezomm anezo."

Ha dioustu goude,e vezint digaset dech endro.

nt-mañ a zigouezas evid ma teufe da wir komzou ar profed:

- Lavarit da verh Sion:

Setu ma teu da Roue davedout,

ediliorh,azezet war eun azenez ha war eun azenig,

beul bihan an hini a zoug ar yeo.

a ra eta an diskibien hag ober a reont ar pez e-noa kemennet Jezuz dezo.

is a reont ganto an azenez hag heh azenig,

lakaad a reont warno o mantilli hag ober da Jezuz azeza.

z a dud a astenn o mantilli war an hent,

lod all a droh skourrou gwez hag o led war an hent.

an oll,koulz ar re a gerz araog hag ar re a zeu warlerh

a youh a bouez-penn :

- Hozanna da Vab David !

Benniget an Hini a zeu en ano Doue

Hozanna e bar an Neñvou !

antre e Jeruzalem,an oll,e kêr,a zo strafuillet braz.

ared a reont:"Piou eo hennez ?"

hag an oll a respont:"Ar profed Jezuz eo,eus Nazared,e bro-Halilea."

de an aviel,e heller ober eur brezegenn verr.Neuze,ar beleg a lak ar brose-

loha,gand eun ali evel hemañ,pe gand komzou heñvel:

Va breudeur kêr ,d'on tro bremañ,groom da Jezuz kên braz enor ha m'o doa

grêt tud an amzer-se,e Jeruzalem.Deom en hent war-lerh ar Groaz.

enn ar prosesion,e kerz ar groaz.Da genta war e lerh,e teu ar beleg hag ar

ouz e servicha,ha goudeze ar bobl.

d'ar brosesion,e kaner ar pez a zo merket amañ,pe kanou all:

IVONENN I (gand ar Salm 23,dreist-oll gwerzadou 7-10)

ale an Hebreed,bodou olivez ha palmez en o daouarn,

eet a-benn hent d'ar Zalver,en eur gana a bouez penn:

anna e barr an neñvou !

KAN kinniget evid ar Salm 23 (ton el levr Kant. N° 50 pe 76)

r ha gloar da Vab Doue,

uz,or Mestr hag or Roue !

'vo dezañ 'pad or bue.

Savit uhel tal an noriou ! 9/ (evel ar gwerzad 7)

Dibradit,doriou peurbaduz,

ma teuo tre 'r Roue a hloar.

Piou hennez,Roue a hloar ? 10/ Piou eo hennez ,roue ar hloar ?

An Aotrou eo,kreñv ha dispont, An Aotrou Doue,Mestr ar Bed,

An Aotrou dispont en emgann. hennez eo ar Roue a hloar !

IVONENN 2 (gand ar Salm 46 - troet evid mond war don Kant. N° 155)

ale an Hebreed a lede o mantilli war an hent hag a gane a bouez penn :

anna 'vid Mab David ! Benniget an Hini a zeu en ano Doue !

SALM 46 penn-da-benn.

Oll boblou ar bed,slakit ho taouarn,

ha savit ho mouez da veuli Doue.

Bez 'eo an Aotrou Mestr doujet pep tra,

ue braz an douar a-bez.

5/Ar broiou a lak da blega dezañ,
blou an douar 'zo e-harz e dreid.
e-neus choazet 'vid e heritaj,
oar Jakob,e vuia-karet.

6-7/Doue 'zav d'an neh 'kreiz eur mor a gan,
ouz son an drompill ,an Aotrou a bign.
Kanit da Zoue,kanit gloar dezañ,
kanit oll enor d'or Roue !

9/Roue eo Doue war ar bed a-béz ,
santelez eo an oll vroiou.
vit kanou kaer d'an Aotrou Doue,
ezet war e dron santel.

10/ Mistri ar poblou 'zeu d'en em staga
ouz pobl Abraham choazet gand Doue;
e dorn Doue 'mañ tud kreñv an douar,
uhel eo Doue dreist p' b tra.

Meuleudi d'an Aotrou Krist Roue (Gloria laus e latin)

skan: Gloar hag enor,ha meuleudi deoh,Aotrou Krist,Roue ha Salver,
ho peus klevet ar vugale laouen o kana deoh an Hozanna.

Roue Israel oh-c'hwi,euz lignez brudet David,
c'hwi ar Roue benniget,o tond en ano Doue.

Ho meuli 'ra an oll Elez ha sperejou eüruz an neñv,
an dud ivez,er bed-mañ,hag an oll grouadurien.

Pobl an Hebreed 'zo eet en arbenn deoh gand bodou palmez;
setu ni bremañ,o tigas deoh pedernou,kan ha meuleudi.

Ganto oh bet meulet p'edoh tost d'ho Pasion;
pa zeuom-ni d'ho meuli,emaoh e gloar ho paradoz.

An dud-se 'zo bet plijet deoh;ra blijo deoh ivez or harantez,
Roue mad,Roue trugarezuz,a gar kement tra 'zo mad.

1. Pa dremener an nor da vond en iliz,kemer ar han-mañ,pe unan heñvel:

Da heul ar Zalver,o tond e kêr Jeruzalem,emañ bugale an Hebreed,
oh embann e tle Mestr ar vuez sevel da veo.
bodou palmez en o daouarn,e kanont a bouez penn:Hozanna e barr an Neñvou !
V/ P'o deus klevet tud ar bobl emañ Jezuz o tond e kêr Jeruzalem,
e kerzont a-benn hent dezañ: Bodou palmez.....

2.Ar beleg a gerz beteg an aoter hag a bok dezi.Ma vez tro d'hen ober,e lak ezañs
a vogedi,oh ober tro an aoter.Goudeze,ez a d'e gador,ha dioustu e lavar Pedenn an
digor,o lezel a-gostez pep tra all euz lidou an digor.

B) LID AN ANTRE SOLANEL (e diabarz an iliz)

2. 'Leh n'eus ket tu da ober ar prosesion en diavêz d'an iliz,e lider donedigez
ar Zalver,gand an antre solanel en diabarz,evel m'eo merket amañ.

3. Emañ an dud fidel pe dirag an nor vraz,pe en diabarz d'an iliz,bodou pe
kourrou ganto en o daouarn.Ar beleg,gand ar re 'zo ouz e servicha,hag ivez eun
poullad tud fidel,a ya (en diavêz d'ar heur)en eul leh êz awalh,evid ma vo gwelet
a klevet pgand ar peb muia euz an dud.

4. Al lid,neuze,a zigor evel merket uhelloh,N° 4-7,da lavared eo:euz kan an digor
eteg goude an Aviel.Mond a ra ar beleg neuze,ar groaz en e raog,a-dreuz an iliz
eteg ar heur,tra ma kaner(uhelloh N°10):"Da heul Or Zalver o tond...pe eur han all

5. Evel an n° II:ar beleg a zalud an aoter hag a ya d'e gador da lavared Pedenn
an digor (izelloh n° 2I).

C) LID AN ANTRE PLÊN

dra-mañ 'zo evid an overennou all euz an deiz:evid merka ar zoñj euz done-
Jezuz da Jeruzalem,e reer an antre plên.

ma ma kerz ar beleg etrezeg an aoter,ar bobl a grog gand kan an digor
var-lerh ,n° 18),pe eur han all gand menozioù heñvel.
ag a bign ouz an aoter hag a bok dezi.Mont a ra d'e gador,hag eno e salud
l hag ar peurrest evel boaz.

AN AN DIGOR:

hweh dervez araog gouel ar Pask,p'edo Jezuz o tond e kêr Jeruzalem,
igale a zo deut en arbenn dezañ,bodou palmez en o daouarn,
ag a bouez penn,e kanent: Hozanna e barr an neñvou ! Meuleudi deoh-hwi,
zo deut gand ho karantez kén braz !
alm 23 / 9-10 - gwelit p. 92

n ilizou,na reer enno na prosesion nag antre solanel,e vo mad ober,en dia-
an overenn,ofiz ar Gomz Santel diwarbenn donedigez Or Zalver hag e Basion,
eur a zigouezo ar gwella,da bardaez ar zadorn pe d'ar zul.

AN OVERENN

vel m'eo bet lavaret dija,e-leh m'eo bet graet ar brosesion pe an antre sola-
beleg alavar diouza PEDENN AN DIGOR:

AN DIGOR

Doue....

ll-halloudeg ha peurbadel,evid dsikouez d'an dud penaos en em izellaad,
ho peus grêt d'Or Zalver diskenn da gemer on natur-dén
zañv maro ar Groaz;
leom eta ar hras da gompren kentelioù e Basion,
gaoud perz en e Adsao da veo.

Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,a oll viskoaz da virviken.AMEN

PENN GENTA

EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (50/4-7)

Servicher Doue,da lavared eo ar Zalver,a zougo e
boaniou gand oll nerz e galon,sentuz ouz Doue.

an Aotrou Doue e-neus roet din teod eun diskibl a zesk mad e gentel,
evid ma vin gouest,dre va homzou,da gonforti ar re 'zo eet skuiz.
Beb mintin,e teu d'am dihuni,da zihuni va diskouarn,
din da zelaou evel ma selaou eun diskibl e vestr.

an Aotrou Doue e-neus digoret din va skouarn;
me n' am eus ket enebet,n'am eus ket tennet a-dreñv.
Va hein am eus troet d'ar re a skoe warnon,
ha va dioujod d'ar re a ziframme va baro;
n'am eus ket dizroet va fas
diouz an dismegañsou hag an taolioù krañch.

an Aotrou Doue eo a zeu d'am zikour:
rag-se ne zantan ket an dsimegañsou,
rag-se am eus laket va fas ken kaled hag eur mên,
ha gouzoud a ran n'am-mo ket miz da gaoud.

SALM 21 (8-9,17-18a,19-20,23-24) - ar salm lavaret, gand Jezuz war ar groaz.

DISKAN : Va Doue, va Doue, perag ho peus va di'ezet ? (gwerzad 2a)
pe: ar po7 4

euz DOUE, GWIR BRIED (kantik.n° 41): Pignom, va ene...

8. Oll ar re am gwel a ra goab ahanon, a astenn o muzellou hag a hej o fenn:
9. "Fizioud a ra war an Aotrou, emezo, ra zeuio d'e zilivra !
d'e lavetei, pa blij kement dezañ !

17. En-dro din ez eus eur vandenn chas; gand eur bagad tud fall on kelhiet;
toulia 'reont va daouarn ha va zreid,
18a. gouest on da gonta an oll eskern euz va horv.

19. Lodenna 'reont va dillad etrezo^{war}; va mantell e tennont ar zord.

2P. Med c'hwi, Aotrou Doue, na jomit ket pell diouzin;
c'hwi va nerz, deuit buan d'am zikour !

23. Bruda 'rin hoh ano dirag va breudeur;
e kreiz ar bobl e kanin ho meuleudi.

24. C'hwi oll, tud a zoujañs Doue, meulit anezañ;
c'hwi oll, bugale e bobl, roit gloar dezañ.

EIL LENNADENN

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-FILIP. (2/6-II)

Pegen izel eo diskennet Mab Doue evid or zavetei,
ha pegen uhel eo savet gand Doue an Tad.

6. Va breudeur, ar Zalver Jezuz, o veza en e stad a Zoue,
n'eus ket fellet dezañ derhel groñs d' ar renk a lak anezañ par da Zoue;
(PE: ne oa ket evitañ eul laeradenn beza par da Zoue)
7. er hontrol (PE: med) diskennet eo ken izel ha netra,
kemeret gantañ ar stad a sklavour (PE: a ervicher),
deut da veza heñvel ouz an dud,
hag anavezet diouzh e zoare evel eun dñs e-touez ar re all.
8. En em izelleet e-neus, ha sentuz eo bet beteg ar maro,
ar maro war ar groaz zokén.
9. Ablamour da-ze, e-neus Doue savet anezañ d'an uhella,
ha roet dezañ an ANO a zo dreist da beb'ano.
10. Rag-se, dirag ano Jezuz e tle an oll plega o daoulin,
en Neñv, war an douar ha dindan an douar,
- II ha peb teod a dle diskleria ez eo Jezuz Krist an Aotrou,
evid gloar Doue an Tad.

SALUD D'AN AVIEL

DISKAN: Meuleudi deoh, Aotrou Krist !
meuleudi deoh, Salver ar Bed !

Evidom-ni eo bet sentuz Or Zalver,
beteg ar maro, hag ar maro war ar Groaz.
Ablamour da-ze, e-neus Doue savet anezañ d'an uhella,
ha roet dezañ an ANO 'zo dreist da beb'ano.

AR BASION: Tri lenner: J: Jezuz
L: al lenner
A: tud all

OR ZALVER JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE .

I. JUDAZ A WERZ E VESTR

- I4/ Deuet eo ar mare ma'z a unan euz an daouzeg, Judaz Iskariot e ano,
da gaoud prinsed ar veleien.
- I5/ Hag e lavar dezo:
- Pegement a rooh din ma lakan Jezuz etre ho taouarn ?
Ar re-mañ a ziviz tregont pezh arhant.
- I6/ Azaleg ar mare-ze, Judaz a glask tro da rei Jezuz dezo.

II. AR GOAN ZIWEZA

- I7/ Da genver deiz kenta Gouel ar Bara heb goell, e teu an diskibien da
lavared da Jezuz:
- E peleh ho peus c'hoant e lakfem pourchas peadra da zibri ar Pask ?
- I8/ Jezuz a respont:
- It e kêr, da di an hemañ-'n-henn ha lavarit dezañ: "ar mestr a lavar:
tost e va eur, en da di ez an da ober ar Pask gand va diskibien.
- I9/ Hag e ra an diskibien evel m'e-noa Jezuz gourhemennet dezo,
ha pourchas a reont ar Pask.
- 20/ Deuet an noz, Jezuz a zo ouz taol gand an daouzeg diskibl,
- 21/ hag epad m'emañ o tibri, e lavar:
- E gwirionez, m'hell lavar deoh, unan ahanoh am gwerzo.
- 22/ Glaharet braz e oant ha peb hini da lavared dezañ:
- Daoust ha me a vefe, Aotrou ?
- 23/ Med eñ a respont:
- An hini e-neus lakeet e zorn er plad ganin, hennez eo am gwerzo.
- 24/ Mond a ra kuit Mab-an-Den, evel m'eo skrivet diwar e benn.
Med gwaz-a-ze d'an den-ze m'eo gwerzet Mab-an-Den gantañ.
Gwelloc'h e vefe bet dezañ ne vefe ket bet ganet.
- 25/ Judaz an hini a werze anezañ, a lavar:
- Daoust ha me e vefe, Rabbi ?
Jezuz a respont:
- Henn lavaret az peus.

III. AN AGONI E JETSEMANI

- 26/ Epad m'emañ o tibri, e kemer Jezuz bara, e rent bennozh, e torr ar bara,
hag henn ro d'e ziskibien, en eur lavared:

- Kemerit ha debrit euz hemañ, va horv eo.

27/ Goudeze e kemer eur halirad, e rent bennoz hag henn ro dezo en eur lavared;

28/ - Evit oll anezañ, rag va gwad eo hemañ, gwad an Emgleo,
skuillet evid eun niver braz a dud, evid^{ar} pardon euz ar pehejou.

29/ Henn lavaret a ran deoh: ne evin mui hiviziken euz ar frouez-mañ euz
ar winienn, beteg an deiz-se ma'h evin ar gwin nevez ganeoh, e Rouantelez
va Zad.

30/ Kana a reont salmou hag ez eont etrezeg Menez an Olived.

31/ Neuze e lavar Jezuz dezo:

- Eun abeg a behed e vezin, en noz-mañ evidoh oll; rag skrivet eo: skei a
rin gand ar mesaer ha srewet e vo an deñved.

32/ Med goude ma vezin adsavet da veo ez in, en o raog, e Bro-Halilea.

33/ Pêr a zav neuze e vouez hag a lavar:

- Ha goude ma teufent oll da goueza, a blamour deoh, evidon-me, ne gouezin ket.

34/ Jezuz a ziskleer dezañ:

- E gwirionez, me lavar dit: en noz-mañ, araog m'e-no ar hillog kanet,
ez po va nahet dre deir gwech.

35/ Ha Pêr dezañ:

- Ha goude ma rankfen mervel ganeoh, nann, n'ho nahin ket !

Hag an oll ziskibien da lavared kement-all.

36/ Neuze e teuont, Jezuz ganto, en eun dachenn anvet Jetsemani hag e lavar dezo:

- Azezit amañ e keit ha ma 'zin pelloh da bedi.

37/ Kas a ra gantañ Pêr, Jakez ha Yann, hag e krog ennañ tristidigez hag enkreiz.

38/ Lavared a ra dezo:

- Doaniet eo va ene da vervel, chomit amañ ha beillit ganin.

39/ Hag eet eun tammig pelloh e kouez war e fas, o pedi hag o lavared:

- Va Zad, mar deo posubl, ra yelo ar halirad-mañ pell diouzin (e-biou din).

Koulzskoude n'eo ket evel a fell din, med evel ma fell deoh.

40/ Dond a ra goudeze da gaoud e ziskibien hag o hav kousket. Lavared a ra da Bêr:

41/ - Evelse n'ho peus ket gallet beilla eun eur ganen ?

Beillit ha pedit, kuit da veza tentet, brividig eo ar spered; ar horv avat,
a zo gwan.

42/ Mond a ra evid an eil gwech da bedi.

- Va Zad, emezañ, ma n'hellket ar halirad-mañ, mond e-biou heb beza eved ganen
ho polontez bezet greet.

43/ O veza deuet endro beteg enno, e kav anezo adarre kousket,
rag pounner oa eet o daoulagad.

O lezel a ra hag ez a endro da bedi evid an deirved gwech,
o lavared c'hoaz ar memes komzou.

Dond a ra neuze a-nevez warzu e ziskibien hag e lavar dezo:

- Kouskit bremañ ha diskuizit !

Deuet eo an eur ma vo lakeet Mah-an-Den etre daouarn ar beherien.

Savit! Deom! Setu m'ema tost an hini am gwerz.

IV. JEZUZ A ZO PAKET

O kaozeal edo c'hoaz pa erru Judaz, unan euz an daouzeg;

ha d'e heul eur vandennad vad a dud, klezeier ha bizier ganto,

kaset gant prinsed ar veleien ha pennou-braz ar bobl.

An trubard e-noa lavaret dezo:

- An hini a bokin dezañ, hennez eo, pakit krog ennañ !

Ha kerkent ez a warzu Jezuz hag e lavar:

- Salud, Rabbi !

Hag e roe eur pok dezañ.

Jezuz a lavar dezañ:

- Va mignon, gra da labour !

Neuze e teuont hag e lakont o daouarn war Jezuz hag e kemeront krog ennañ

Unan euz ar re a oa gand Jezuz a astenn e zorn da denna e gleze,

skei a ra war servicher ar beleg braz ha troha dezañ e skouarn.

Neuze e lavar Jezuz dezañ:

- Laka da gleze en e blas, rag ar re a c'hoari gant ar hleze
a varv dre ar hleze.

Kaoud a ra dit n'hellfen ket goulenñ sikour digand va Zad,

hag e tigasfe din dioustu ousspenn daouzeg strollad êlez.

Med penaos e teufe neuze da wir ar Skrituriou hag a lavar

e tle beza kont evelse ?

D'ar mare-ze, Jezuz a lavar d'ar bobl:

- Deuet oh evel d'eul laer, gand klezeier ha bizier d'am faka.

Bemdez e vezen azezet en Templ o prezeg ha n'ho peus ket va fakat.

Med kement-se a zo hc'hoarvezet evid ma vo sevenet Skridou ar Brofeted.

Neuze e oll ziskibien hemm dilez hag a deh kuit.

V. JEZUZ DIRAG KAÏFAZ

Ar re all avad, a bak krog e Jezuz, hag e gas ganto da di Gaïfaz, ar beleg

braz, e-leh ma oa bodet ar skribed ha pennou-braz ar bobl.

- 58/ Pêr a ya da heul, euz a bell, beteg porz ar beleg-braz,
antreal hag azeza a ra e-touez ar zrrvicherien, evid gweled peseurt
fin a vefe d'an abadenn.
- 59/ Koulskoude, prinsed ar veleien hag ar Huzul Braz en e bez a glask eur
falz-testeni benag a eneb Jezuz, evid kaoud abeg d'e lakaad d'ar maro.
- 60/ Ne gavont ket daoust ma oa deuet meur a dest faoz.
- 61/ A-benn ar fin e teu dacu hag a lavar:
- An den-ze e-neus diskleriet: me a hell diskar an Templ
hag e zevel endro e tri devez.
- 62/ Ar beleg-braz a zao en e zav hag a lavar da Jezuz:
- Ne respontez netra ! Peseurt testeni a zoug ar re-ze a eneb dit ?
- 63/ Jezuz a jom mud. Ar beleg-braz a lavar dezañ:
- Da aspedi a ran, en ano an Doue beo, da lavared deom ha bez 'ez out ar
Mesiaz, Mab Doue ?
- 64/ Jezuz a respont:
- Henn lavaret az peus; ouspenn, me'l lavar deoh:
hiviziken c'hwi a welo Mab-an-Den azezet en tu dehou d'an OLL-Halloudeg,
hag o tond war goabremmou an neñv.
- 65/ Neuze e rog ar beleg-braz e zillad, en eur lavared:
- Blasfemet e-neus; petra'sonjit ?
- 66/ Hag int da respont:
- Meritout a ra ar maro !
- 67/ Neuze, e tufont outañ war e zremm, hag e roont dezañ, lod flahajou,
68/ lod all javedadou, en eur lavared:
- C'hoari da brofed Mesiaz ! Piou eo an hini e-neus skoet ganez ?

VI. PER A NAH E VESTR HAG A ZEU KEUZ DEZAN

- 69/ Hogen Pêr a oa azezet er mêz, e-barz ar porz,
hag e tosta outañ eur vatez, en eur lavared:
- Te ivez a oa gand Jezuz ar Galilean.
- 70/ Med nah a ra dirag an oll en eur lavared:
- N'ouzon ket petra 'fell dit lavared.
- 71/ O veza m'edo o vond warzu an nor, eur vatez all her gwel hag a lavar
d'ar re a oa war al leh:
- Hemañ a oa gand Jezuz, an Nazarean.
- 72/ Hag adarre e nah, en eur doui:
- Ne anavezan ket an den-ze.
- 73/ Prestig goude, ar re a oa eno a dosta hag a lavar da Bêr:

- Difazi eo ! Te ivez a zo euz an dud-se, diouz da zoare komz eo sklêr !
Neuze eh en em ro da vallozi ha da doui ne anavez ket an den-ze.
/ Raktal e kan ar hillog. Ha Pêr a zeu da zonz dezaf euz ar pezh e-noa
lavaret Jezuz: araog ma kano ar hillog, az po va nahet dre deir gwech.
Mond a ra Pêr er mêz hag e skuill d'aelou c'hwero.

VII. JUDAZ EN DIZESPER

Deuet ar mintin, prinsed ar veleien ha pennou-braz ar bobl a zalc'h kuzul
a-eneb Jezuz, evid e lakaad d' ar maro.

E liamma a reont, hag e gas ganto evid e lakaad etre daouarn Pilad,
ar gouarnour.

Neuze Judaz, an hini e-noa e werzet, o weled e oa kondaonet Jezuz
a zav keuz gantañ, hag a rent an tregont pezh arhant da brinsed ar
veleien ha da bennou-braz ar bobl, en eur lavared:

- Pehet am eus o werza eur gwad didamall !

Inti a lavar:

- Petra 'ra an dra-ze deom ? An dra-ze a zell ouzit !

Stlepel a ra ar peziou arhant e diabarz an templ ha mond kuit.

Eet kuit ez a d'en em grouga.

Hogen goude beza dastumet ar peziou, e lavar prinsed ar veleien:

- N'heller ket o lakaad e tenzor an Templ, peo gwir ez int priz ar gwad.

Ha goude beza dalhet kuzul, e prenont gand an arhant park eur poder
da ober anezañ eur vered evid an diavêzidi.

Setu perak eo bet anvet ar park-se, park ar gwad, beteg henn.

Evelse e oa sevenet komzou ar profed Jeremias: "Hag e kemerjont an
tregont pezh arhant, ar priz o doa bugale Israel divizet paea evitañ.

0/ Hag e rojont anezo evid park eur poder hervez
m'e-noa gourhemennet an Aotrou."

VIII. JEZUZ DIRAG PILAD

1/ Kaset eo Jezuz dirag ar gouarnour Pilad, hag hemañ a houlenne outañ:

- Ha bez 'ez out-te Roue ar Yuzevien ?

2/ Jezuz a respont:

- Henn lavaret az-peus.

Med ne respont netra d'an tamallou greet dezaf gand prinsed ar veleien

ha pennou-braz ar bobl.

13/ Neuze e lavar Pilad dezañ:

- Ne glevet-te ket kement a lavaront a eneb dit ?

14/ Med ne respont mui war boent ebed, ken na oe souezet braz ar gouarnour.

15/ Da genver peb gouel, edo ar hiz gand ar gouarnour

da rei d'ar bobl frankiz eur prizoniad, an hini a garent.

16/ Hogen, bez'e oa d'ar mare-ze eur prizoniad brudet, Barrabaz e ane.

17/ Pa oa bodet an dud, e lavar dezo Pilad:

- Pehini euz an daou-mañ a garfeh e ve roet dezañ e frankiz:

Barrabaz pe Jezuz anvet ar Mesiaz ?

18/ Rag gouzoud a ree e oa dre warizi oa bet gwerzet.

19. Endra m'edo Pilad el lezvarn e wreg a gas eun den da lavared dezañ:

- Arabad eo e vefe tra pe dra etrezout hag an den just-se,

rag hirio em-eus bet kalz poan-spered en eun huñvre ablamour dezañ.

20/ Hogen prinsed ar veleien ha pennou-braz ar bobl a boulz an dud da

houleñ Barrabaz ha da gas Jezuz d'ar maro.

21/ Ar gouarnour a lavar dez :

- Pehini eta euz an daou-mañ a fell deoh e rofen dezañ ar frankiz ?

Hag e lavaront:

- Barrabaz !

22/ Ha Pilad dezo:

- Ha petra 'rin 'ta euz Jezuz anvet ar Mesiaz ?

An oll neuze da lavared:

- Ouz ar groaz !

Ha Pilad adarre:

23/ - Peseurt droug e-neus greet ?

Hag e youhont c'hoaz krenfoh:

- Ouz ar groaz !

24/ Pilad o weled e koll e amzer hag e kreske kentoh an trouz

a gemer dour hag a walh o zaouarn dirag an dud, en eur lavared:

- Direbech on euz maro an den-ze; deoh-c'hwi da weled !

25/ Ar bobl a unan da lavared:

- Ra gouezo e wad warnom ha war or bugale !

26/ Neuze e lez ganto Barrabaz.

Lakaad a ra skourjeza Jezuz hag e ro anezañ da veza staget ouz ar groaz.

IX. JEZUZ GWALL-GASET HA GOAPEET

27/ Neuze, soudarded ar gouarnour a gas ganto Jezuz, en ti-lez-varn,

hag a vod endro dezañ ar gompagnunez en he fez.

Diwiska a reont anezañ ha taoler warnañ eur vantell ruz-moug.

Blañsona a reont eur gurunenn spenn hag he lakaad war e benn,
en e zorn dehou e lakont eur vaz korz.

Daoulina a reont dirazañ ha lavared dre hoapêrêz: Salud, roue ar Yuzevien!

Hag en eur dufal outañ, e kemerent ar vaz korz da skei war e benn.

Goude beza greet goap outañ, e tennont diwarnañ e vantell,
e wiskont dezañ endro e zillad, hag e kasont anezañ ganto da veza
staget ouz ar groaz.

X. WAR HENT AR HALVAR

En eur vond er mez, e kavont eun den euz kêr Sirên, Simon e ano.

Urz a reont dezañ da gemer warnañ kroaz Jezuz;

Degouezet el leh anvet Golgota, da lavaret eo ar glopenn,
e reont dezañ da eva dour mesket gand bestl.

Jezuz a danva, med ne fell ket dezañ eva.

P'o deus staget anezañ ouz ar groaz, e lodennont e zillad etrezo,
hag e tennont anezo d'ar zort.

Azeza 'reont d'e ziwall.

A-uz d'e benn, e lakont eur skritell, gand abeg e gondaonasion:

Jezuz eo hemañ: roue ar Yuzevien.

Daou dorfetour a zo staget ouz ar groaz war eun dro gantañ,
unan a zehou, eun all a gleiz.

An dreminidi a zistag gantañ komzou flemmuz, en eur heja o fenn.

Lavaret a reont:

- Te hag a ziskar an Templ hag henn laka endro en e zav gand ober tri
dervez, en em zaveta da-unan, mar dout Mab Doue ha diskenn diwar ar

En hevelebr doare, prinsed ar veleien, ar skribed, pennou-braz ar bobl a
a lavar:

- Saveteet e-neus re all ha n'hell ket en em zavetei e-unan !

Roue Israel eo; dezañ bremañ diskenn diwar ar groaz hag e kredim ennañ.

War Doue e-neus kontet; ra zeuio Doue bremañ d'henn dilivra, mar deo
douget dezañ, rag lavaret e-neus: "Me 'zo Mab da Zoue."

En hevelebr doare, al laeron o-unan, staget ouz ar groaz,
eveldañ a daol outañ komzou dismegansuz.

XI. JEZUZ A VARV WAR AR GROAZ

- L. 45/ Azaleg kreisteiz beteg teir eur, an deñvalijenn a holo ar vro a-bez.
- 46/ War dro an eur-ze, e lez Jezuz eur griadenn vraz:
- J. - Eli, Eli, lama sabaktani
- L. da lavared eo:
- J. - Va Doue, va Doue, perag ho peus va dilezet ?
- L. 47/ Ouz e glevet, lod euz an dud a zo war al leh a lavare:
- A. - O hervel Eliaz ema !
- L. 48/ Raktal unan anezo a red da gemer eun tamm spoue,
e garga 'ra a winegr hag e laka anezañ e beg eur vaz korz
da rei dezañ da eva.
- 49/ Ar re all a lavar:
- A. - Lez 'ta ! Gwelom ha dond a ray Eliaz d'e zavetei !
- 50/ Med Jezuz o veza lezet adarre eur griadenn vraz a dremenas.
.....
(amañ, e taouliner hag e chomer sioul eur pennad)
- L. 51/ Neuze e rog gouel an Templ e daou euz an neh d'an traon,
an douar a gren hag ar reier a faout,
- 52/ ar beziou a zigor, meur a zant, eet da anaon a zav da veo.
- 53/ Deuet er mez euz o beziou, goude adsao Jezuz da veo
e teuont er Gêr Zantel hag eh en om ziskouezont da vour a zen.
- 54/ AN ofiser roman hag ar re a oa gantañ o tiwall Jezuz,
pa welont ar hren-douar hag ar pez a dremen,
a grog aon enno hag a lavar:
- A. - E gwirionez, Mab Doue oa hemañ !
- L. 55/ Bez ' e oa ivez eno kalz merhed o selled^{euz} a bell,
ar re-ze hag a oa ouz e servija abaoe ma 'z oant deuet d'e heul
azaleg Bro-Halilea.
- 56/ En o zouez, ema Mari Madalen, Mari, mamm Jakez ha Josef,
ha mamm mibien Zebede.

XII. JEZUZ A ZO LAKEET ER BEZ.

- L. 57/ Deuet an abardaez, e teu eun den pinvidig euz Arimati, e ano Josef,
eñ ivez diskibl da Jezuz.
- 58/ Mond a ra da gaoud Pilad da houlenñ korv Jezuz.
Pilad a ro urz d'henn rei dezañ.

SUL AR BASION HAG AR BLEUNIOU

- / Josef a gemer ar horv hag er groñn en eul liser nê.
/ Lakaad a ra anezañ en eur bez nevez-flamm,e-noa lakeet toulla evitañ e-unan er roh.
Ruill a ra eur men braz da stanka ar bez hag ez a kuit.
/ Hogen Mari a Vagdala a oa eno hag ar Vari all azezet dirag ar bez.

XIII. GWARDOU A ZO LAKET DA ZIWALL AR BEZ.

- / Antronoz ,hag a oa deiz ar zabad,prinsed ar veleien
hag ar skribed en em vod e ti Pilad.
/ Lavared a reont dezañ:
- Aotrou,sonj on-eus,e-neus an toueller-se lavaret pa oa beo c'hoaz:
goude tri dervez,e tihunin a douez ar re varo;
/ Ro urz eta ma vo diwallet ar bez beteg an trede dervez,
gand aon ma teufe e ziskibien d'e gas ganto,
ha da lavaret d'ar bobl:dihunet eo a douez ar re varo,
hag e vezo an taol touellêrêz-se gwasoh eged ar henta.
/ Pilad a lavar:
- Gwarded ho peus,it ha lakit diwall ar bez,evel ma karoh.
/ Int-i eta a ya diouz o zu,a laka ar bez e savete,
o siella ar mên hag o lakaad gwardou.

PROVOU: Ha pedi a reom,Aotrou Doue,dre Basion ho Mab karet,
ma teuo beteg ennom ho pardon madelezuz;
ma ne veritom ket anezañ,dre on oberou,
reom e reseo digand ho trugarez,
ortuz ar Zakrifis n'eus nemetañ. DRE JEZUZ KRIST,OR ZALVER. AMEN !

E gwirionez.....dre Jezuz Krist,Or Zalver.
En a zo fellet dezañ,dibeh ma oa,gouzañv evid ar beherien,
ha beza kondaonet,heb beza grêt netra'fall,
evid ar re o doa grêt an droug;
E varo e-neus gwalhet or pehejou,
hag e Adsao da veo e-neus roet deom a-nevez buez ar hras.
Drezañ emañ an neñv hag an douar,an êlez hag an arhêlez,
oh embann deoh meuleudi hag enor,heb skuiza morse o lavared:

AR GOMUNION:

Maget gand ar Zakramant Santel,ni ho ped stard,Aotrou Doue,
dre Varo ho Mab,ho peus roet deom an esperans
da gaoud ar pezh na welom ket hag a anavezom dre ar Feiz; +
grit deom,drezañ adsavet da veo,
mond beteg an termen eüruz a glaskom.
DRE JEZUZ KRIST,OR ZALVER.

AMEN !

LENNADENN GENTA : Ar re oll a oa bet gounezet d'ar feiz a veve asamblez
hag a lakee o madou e boutin.

LENNADENN EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL. 2/42-47

42. Ar gristenien genta a veze aketus da zelaou keleennadurez an Ebestel,
da veza unanet ~~ed~~ breudeur,
da gemer perz e lid ar bara torret hag er pedennou.
43. Doujañs Doue a rene e kalonoù an oll,
kalz burzudou ha sinou a veze grêt gand an ebestel.
44. Ar re oll a oa gounezet d'ar feiz a veve asamblez hag a lakee o madou e
boutin.
45. Gwerza 'reent o feadra hag madou
hag e rannent ar priz etrezo oll,
da beb hini diouz e ezomm.
46. Ar hiz a oa ganto da vond bemdez asamblez d'an templ,
da gemer perz en o ziez e lid ar bara torret,
da zibri o frejou gand levenez
ha gand eur galon didroidell.
47. Meuli a reent Doue, deuet mad e oant d'an oll,
ha bemdez e lake Doue, kristenien nevez
da zond en o zouez, galvet gantañ d'ar zilvidigez.

SALM II7 (2-4, I3-I5, 22, 24

2-4 K. I4 . p. I6I

DISKAN/

- Lavarit bennoz da Zoue,
ken mad ha trugarezuz eo,
n'eus fin ebed d'e vadelez ! ALLELUIA ! war evez ! staga gand 2-4
- I3. Eur gwall stokadenn az peus roet din
d'am lakaad da goueza.
Med harp am-eus kavet e Doue.
 - I4. Doue eo va nerz, e veuli a ran,
deuet eo d'am zavetei .
 - I5. Tregerni a ra teltennou an dud just,
gand ar youhadennou-a levenez,
youhadennou an treh.
2. Lavarit 'ta, pobl Israel: n'eus fin ebed d'e vadelez.
 4. Lavarit, c'hwil, servicherien Doue: n'eus fin ebed d'e vadelez.
 22. Ar mên taolet kuit gand saverien an ti, setu grêt anezañ ar mên-korn.
 24. Hemañ eo an dervez braz grête gand an Aotrou:
lammom ha tridom gand al levenez !

EIL LENNADENN: Doue e-neus roet deom eur vuez nevez dre Jezuz Krist
savet da veo ha roet deom eun esperañs birvidig.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT PER .IP I/3-9

3. Meuleuli da Zoue, Tad Or Zalver Jezuz Krist,
e-neus bet ar vadelez vraz da rei deom eur vuez nevez,
dre Jezuz Krist savet a varo da veo,
ha roet deom eun esperañs virvidig,
4. eun eritaj ha ne hell ket breina, na beza saotret, na gweñvi,
eun eritaj miret evidoh en Neñvou,

c'hwi hag e-neus galloud Doue dalhet,dre ar feiz,
 evid ar zilvidigez,eur zilvidigez a zo prest evid en em ziskouez,
 pa vo fin d'an amzeriou.
 ement-se ho laka da dridal gand ar joa,
 daoust ma'z eo red deoh c'hoaz,
 epad eur pennad amzer,kaoud da houzañv e meur a zoare.
 velse,talvoudegez ho feiz,priziusoh eged an aour,
 eun dra dibaduz,hag a vez amprouet dre an tan,
 a vo kavet din a veuleudi,a hloar hag a enor,
 pa zeuy ar mare da Jezuz Krist d'en em ziskouez.
 ared a rit anezañ heb beza e welet,heb e weled c'hoaz bremañ,
 e kredit ennañ,
 leun a feiz e tridit gand eur joa dreist-lavar ha leun a hloar,
 sur ma 'z oh war ar pezh a zeu deoh diwar ar feiz:silvidigez an eneou.

D'ANAVIEL

ia ! Deuit,Spered Santel ! Kargit kalonou ho tud fidel
 ha c'hwezit enno tan ho karantez ! Alleluia !

JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN . 20/19-23

a geñver deiz ar Pask,diouz an abardaez noz,
 an noriou premet war al leh m'eo bodet an diskibien,
 gand aon rag ar Yuzevien,
 e teu Jezuz en o zouez,hag e lavar dezo:" Ar peoh ra vo ganeoh !"
 goude beza lavaret kement-se,e tiskouez dezo e zaouarn hag e gostez.
 Jaouen braz eo an diskibien o weled an Aotrou.
 Jezuz a gomz outo a-nevez:" Ar peoh ra vo ganeoh !"
 Evel m'e-neus va Zad kaset ahanon,
 me ho kas d'am zro."
 Goude ar homzou-se,e c'hwez warno,en eur lavared:
 " Resevit ar Spered Santel !
 D'ar re ho po pardonet dezo o fehejou,e vezint pardonet,
 ha d'ar re ho po o dalhet outo,e vezint dalhet."

N AN DIGOR

Doue ! Aotrou Doue,trugarezuz a viskoaz da viken,
 buezekaad a rit feiz ho pobl gand gouelioù ar Pask;
 eta da greski ar hras on beus bet diganeoh,
 mprenim gwelloc'h pebez badeziant he deus or gwalhet,
 e be Spered om bet ganet a-nevez,
 and gwad piou om bet prenet.
 c Zalver Jezuz Krist,ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh
 and ar Spered Glan a oll viskoaz da virviken . AMEN !

ROVOU

erit gand madelez,Aotrou Doue,provou ho pugale gristen;
 dezo buez nevez dre ar feiz hag ar vadiziant,
 n'o devo ivez an eürusted peurbaduz.DRE Jezuz Krist,Or Zalver. AMEN !

S ar sul Fask hag an eizvetez.

AR GOMUNION : Ni ho ped,Doue oll-halloudeg:goude m'on-eus resevet,er Zakra-
 mant ho Mab bet maro evidom hag adsavet da veo e Mister e
 grit deom e zigemer dalhmad e don or halonou.En on Doue beo,a oll viskoaz da
 zen.AMEN !

LENNADENN GENTA: Jezuz n'helle ket chom dindañ galloud ar maro.

LENNADENN EUZ OBEROU AN EBESTEL. 2/I4,22-28

14. Pêr eneuze, an ebestel all endro dezañ, gand eur vouez kreñv a lavar:
22. - Gwazed Israel, selaouit ar homzou-mañ: Jezuz a Nazared,
an hini e-neus Doue roet daoh da anaoud, dre ar miraklou,
ar burzudou hag ar sinou e-neus grêt
23. en ho touez, evel ma ouezit mad.
An den-se hag a oa bet gwerzet, hervez ar pezh a oa bet divizet dres
gand Doue hag hervez ar pezh a ouie mad an Aotrou Doue en araog,
c'hwi ho-peus tapet krog ennañ hag e lakeet d'ar maro,
en eur ober d'ar bayaned e staga ouz ar groaz.
24. Med Doue e-neus e zavet da veo, o lakaad eun termen da boaniou ar maro;
n'helle ket chom dindañ galloud ar maro,
25. rag David a lavar diwar e benn:
- Gweled a reen dalhmad an Aotrou dirazon,
rag a zehou din ema evid mired ouzin da horjella;
26. setu perag ez oa levenez em halon
ha komzou laouen war va muzellou.
27. Va horv e-unan a ziskuiizo en esper,
ne vo ket dilezet ganez va ene e rouantelezh an anaon;
ne lezi ket da zen santel da drei e breinadurez;
28. diskouezet az-peus din heñchou ar vuez,
ha karget e vin a levenez gand ar gwel ahanout.

SALM I5

I-2a, 5-7, 7-II

DISKAN: Tridal a ra va halon e Doue,
ha joa 'zo em ene.

- I. Va mirit, Aotrou Doue,
en ho kichen, e kavan repu.
- 2a Lavaret a ran d'an Aotrou: C'hwi eo va Mestr .
5. C'hwi va lod ha va halirad;
etre ho taouarn ema va flanedenn.
7. Bennozh d'an Aotrou, e-neus roet kuzul din;
dre va housk zoken, e kendalh d'am hentelia.
8. Heb ehan, e talhan an Aotrou dirazon,
p'ema en tu dehou din, ne gouezin ket.
9. Tridal a ra va halon ha joa 'zo em ene
ha va horv ive 'zo er peoh.
10. Na zilezit ket ahanon e bro an anaon,
ha ne vo ket ho mignon boued ar vreinadurez.
- II. Ober a reoh din anaoud hent ar vuez;
dirazoh ar galon 'zo leun-barr a levenez;
en ho kichen ez eus eurusted peurbaduz.

EIL LENNADENN: Dre wad priziuz Or Zalver eo oh bet dasprenet.

LENNADENN EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PER. (I/I7/2I)

17. Ma roit an ano a Dad d'an hini a varn an dud,

diouz m'o deus grêt peb hini anezo,
 heb derhel kont euz ar pezh ma'z int a hend-all,
 bevit gand doujañs epad m'emaoh divroet er bed-mañ.
 eo ket, gouezit mad, gand traou a ya da netra, arhant pe aour,
 eo ez oh bet dilivret euz an doare beva didalvez deuet deoh
 digand ho tadou,
 med gand eur gwad priziuz: hini eun oan didech ha diempech, ar Hrist,
 bet dibabet araog krouidigez ar bed
 ha roet da anaoud en amzeriou diwaeza evidoh.
 reizañ eo e kredid e Doue e-neus e zavet da vea a douez ar re varo
 ha roet dezañ ar hloar;
 ra vo eta e Doue ho feiz koulz hag hoh esperañs.

D'AN AVIEL

IA ! Da Oan Pask 'vidom-ni eo bet lazeta Jezuz Krist.
 Deom gand levenez ouz taol Or Zalver !

JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ. (24/13-35)

En deiz-se, an trede goude maro Jezuz,
 setu daou euz e ziskibien oh ober hent warzu eur gêriadenn,
 anvet Emmaou, a zo war-dro div eur bale diouz Jeruzalem.
 Ha kaoz a oa ganto euz an oll draou a oa bet hoarvezet.
 E-kreiz o divizou, pa lavarent o zontjou an eil d'egile,
 Jezuz e-unan a zo deuta en o hichen hag a ree hent ganto.
 Med o daoulagad ne oant ket evid e anaoud.
 Enn a lavar dezo: "Peseur divizou ho peus etrezoh en eur vale ?"
 Chom a reont a-zav, teñval o fenn.
 Hag unan anezo, Kleopaz e ano, a respont dezañ:
 - N'eus nemedoh diavêzour e Jeruzalem o veza heb gouzoud
 an traou c'hoarvezet e kêr en deizioù-mañ ?"
 Gouelenn a ra outo:
 - Peseur traou ?
 Hag int da respont:
 - Diwarbenn Jezuz a Nazared:
 hennez a zo bet eur profed braz e halloud
 en e oberou hag en e gomzou, dirag Doue ha dirag ar bobl a-bez;
 med an arhveleien (pe: ar veleien vraz) ha renerien ar bobl
 o deus roet anezañ d'ar gouarnour
 evid ma vije kondaonet d'ar maro ha staget ouz ar groaz.
 NI, koulskoude, on-noa esperañs e oa-enn o vond da zavetei Israel.
 Ha gand kement-se, emañ bremañ an trede dervez,
 abaoe m'eo bet c'hoarvezet an traou.
 Gwir eo ez eus merhed euz or re-ni hag o deus lakeet ahanom nehet:
 eet int, mintin mad, d'ar béz,
 n'o deus ket kavet e gorv, ha deuta int en-dro;
 lavaret a reont zoken o deus gwelet êlez
 ha klevet ganto emañ e buez.
 Neuze, unan bennag euz or re-ni a zo eet beteg ar béz,
 ha kavet o deus peb tra evel ma lavare ar merhed,
 nemed enn n'o deus ket gwelet anezañ.
 Lavaret a ra Jezuz dezo:
 - O tud berr a spered ha pell o kredi
 kement o deus lavaret ar brofeted !
 Daoust ha ne ranke ket ar Mesiaz gouzañv ar poaniou-se,
 evid antreal en e hloar ?

27. Neuze, o kemer Moizez da genta, ha goudeze an oll brofeted,
e tispleg dezo, en oll Skrituriou, ar peñ a zo diwar e benn.
28. Dond a reont evelse da gichen ar gêriadenn ma 'z eent,
hag eñ a ra an neuz (pe: a ra van) da gerzed pelloh.
29. Med int a bourchu warnañ, en eur lavared:
- Chomit ganeom, rag deut eo an abardaez,
hag an deiz a zo dija war e ziskar.
Hag ez a en ti evid chom ganto.
30. Ha setu, epad m'edo-ouez taol ganto,
o veza kemeret bara, e-neus lavaret ar vennoz,
hag o veza e dorret, e-neus roet dezo.
31. Neuze e tigor o daoulagad hag eh anavezont Jezuz,
hag eñ a ya kuit diwar o gwel.
32. Hag e lavaront an eil d'egile:
- Ha n'eo ket gwir edo or halon o virvi ennom,
epad ma komze ouzom en hent ha ma tisplege deom ar Skrituriou ?
33. Sevel a reont raktal, ha distrei da Jeruzalem ;
éno e kavont bodet an unneg abostol hag ar re 'oa ganto,
34. hag o hlevont o lavared: " Gwir mad eo (pe: Heb douetañs ebed-),
dazorhet eo an Aotrou (pe: savet eo an Aotrou da veo)
hag en em ziskouezet eo da Zimon.
35. Hag an daou ziskibl, d'o zro, a gont petra 'zo digouezet war an hent
ha penaos o deus e anavezet p'e-neus torret ar bara
(pe: diouz torr ar bara)

PEDENNOU AN DIGOR:

Pedom Doue... Aotrou Doue, goude beza digaset d'ho pobl
nerz ha yaouankiz nevez,
grit ma chomo da viken el levenez;
joa ennom bremañ, gand an enor da veza ho pugale,
dalhit stard ennom an esperañs,
da hortoz an deiz ma savim a varo a veo.
DRE OR ZALVER JEZUZ KRIST, HO MAB HAG ON AOTROU,
DOUE BEO GANEOH HA GAND AR SPERED GLAN, A OLL VSKOAZ DA VIRVIKEN. AMEN !

WAR AR PROVOU:

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ober digemer vad
d'ar provou a ginnig deoh an Iliz e-kreiz levenez ar PASK;
goude beza digaset dezi joa ken braz,
grit ma vleunio enni al levenez da viken.
DRE JEZUZ KRIST, OR ZALVER. AMEN !

PREFAS : unan euz re an Amzer Fask.

GOUDE AR GOMUNION:

Sellit, gand madelez ouz ho pobl, Aotrou Doue:
pegwir ho peus roet deom buez nevez dre ho sakramañchou,
dalhit, ni ho ped, d'on heñcha ha d'on diwall,
beteg ma kavim, korv hag ene, gloar an adsao da veo.
DRE JEZUZ KRIST, OR ZALVER. AMEN !

NN GENTA: Doue e-neus grêt euz Jezuz an Aotrou hag ar Hrist.

NN EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL. (2/I4a,36-41)

neuze,an ebestel all endro dezañ,a lavar gand eur vouez kreñv:

- Tud Israel,red eo deoh gouzoud mad kement-mañ:

Jezuz ho peus c'hwi staget ouz ar groaz,

Doue enneus grêt anezañ an Aotrou hag ar Hrist.

homzou-se a dreuz dezo o halon hag e lavaront da Bêr ha d'an ebestel all:

- Petra on-neus-ni da ober ?

Chench buez,eme Bêr dezo,ha goulennit, peb hini ahanoh,

beza badezet en ano Jezuz Krist,evid kaoud ar pardon euz ho pehejou,

hag ho pezo ar Spered Santel e donezon.

bromesa a zo bet grêt evidoh,evid ho pugale

hag evid ar re oll a zo a bell ken niveruz ha ma plijo gand Doue

o golver.

alz traou-all a lavare dezo c'hoaz evid o alia hag o aspedi:

- Tehit,emezañ,euz ar ouenn dud diroll-mañ.

nti eta,o veza grêt (pe: ar re o doa grêt) digemer vad d'e gomzou a houlen

ar Vadiziant.

ar dro tri mil den a oe gounezet en dervez-se d'ar feiz.

2 I-3a,2bc-4,5-6

Doue eo va Fastor,

ne vanko din netra;

rag war ar peuri druz,

am has da ziskuiza.

an Aotrou eo va fastor,n'am eus diouer a netra.

war ar prajou geot tener,e ra din gourvez;

daved doureier an diskviz e kas ahanon,

ha nerz fresk a ro d'am ene.

va heñcha 'ra dre ar gwennojennoù surra,evid enor e ano.

da pa rankfen kerzed dre stankenn an Ankou,

n'am eus aon rag droug ebed,rag c'hwi 'zo ganin.

do penn-baz hag ho kwalemm am laka dineh.

evidon e lakit an daol,dirag sellou va enebourien;

an eoul c'hwéz-vad a skuillit war va fenn,

ha va halir (pe: va skudenn) a zo leun-barr.

türusted,gand ho madelez,a vo va lod,bemdez 'hed va buez;

digemer a gavin e ti an Aotrou,epad hir amzer.

NNADENN: Deuet oh endro warzu ho mesaer,an hini a daol evez warnoh.

NN EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT PER. (2/20-25)

va breudeur,gouzañv goude beza grêt ar mad,ha gouzañv gand pasianted,

setu ar pezh a blij da Zoue.

kement-se eo a houlenner diganeoh,rag ar Hrist ivez e-neus bet da houzañv

evidoh,roet e-neus skouer deoh evid ma teufeh da gerzed war e roudou,

eñ ha n'e-neus morse grêt pehed na distaget gaou ebed.

23. eñ,dismeganset,ha ne zismeganse ket,eñ gwall gaset
ha ne hourdrouze ket,med a lake e fiziañz en hini a varn
gand lealded.
24. Eñ,e-neus e-unan douget en e gorv or pehejou war goad ar groaz;
evid ma hellfem mervel d'or pehejou ha beva santel,
e-neus roet deoh ar pare dre houliou e gorv.
25. C'hwil a oa evel deñved diaket,med bremañ ez oh distroet da gaoud
ar pastor,an hini a daol evez war hoh eneo.

BALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia ! Me eo ar pastor mad,anaoud a ran va deñved
ha va deñved a anavez ahanon. Alleluia !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN. (IO/I-IO)

1. Jezuz a gomze evelhenn d'ar Farizianed: "E gwirionez,e gwirionez,m'henn
lavar deoh,an neb n'e ya ket e kraou an deñved dre an nor,med a ya
(bign) dre eul leh all,hennez a zo laer ha torfetour.
2. An neb a ya dre an nor eo pastor an deñved,ar porzier a zigor dezañ
3. hag an deñved a zelaou e vouez.
Gervel a ra peb hini dre e ano an deñved a zo dezañ hag e kas anezo er mêz.
4. P'e-neus o haset oll er mêz,e kerz en o raog;an deñved a ya d'e heul
rag anaoud a reont e vouez.
5. Ne daint ket da heul eun den all,med tehed a raint dioutañ,
rag ne anavezont ket mouez ar re all.
6. Setu ar barabolenn lavaret gand Jezuz d'ar Farizined...,med ne gomprenont ket
ar pez a lavar dezo.
7. Jezuz neuze da lavared dezo:"E gwirionez,e gwirionez,m'henn lavar deoh,
me eo dor an deñved. Laeron ha tud fall eo an oll re a zo deuet em raog
med an deñved n'o deus ket o zelaouet.
8. Me eo an nor;an neb a antreo drezon a vi salvet;mond ha dond a ray euz ar
hrou d'ar mêz,ha kaoud a ray da beuri.
10. Al laer avad,ne zeu nemed evid laerez,laza ha distruja.Me a zo deuet evid rei
ar vuez d'an deñved,ha rei dezo eur vuez birvidig.

PEDENN AN DIGOR: Pedom Doue...Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
renit ahanom daved ar joaiou na vo fin ebéd dezo,
ma vo poblad ho tud fidel bodet en ho kichen,
dindañ dorn ar PASTOR n'eus nemetañ,Jezuz Krist,ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU: Plijet ganeoh,Aotrou Doue,ma talvezo an Overenn-mañ
da vaga ennom al levenez a zeu deom diganeoh;
or zikourit da gemer perz gand frouez,
e Sakrifis ho Mab Maro evid or prena hag Adsavet da veo,Jezuz Krist,Or Zalver.

GOUDE AR GOMUNION: Pedom Doue...Tad Oll-halloudeg ha Pastor leun a vadelez,
plijet ganeoh diwall ho teñved gand karantez tener;
goude beza or zaveteet gant Gwad ho Mab,
grit ma'z aim da veva eüruz e(prajou glaz)ho Paradoz.

Dre Jezuz Krist,Or Zalver. AMEN !

2. Kan an Digor - Salud ar beleg.....	I
3. Lid ar binijenn.....	3
4. Pedenn-létani:Kirie.....	2
5. Gloria.....	4
version bretonne du Gloria.....	40
6. Pedenn an Digor.....	8
7. Alleluia.....	9
8. Aviel.....	12
9. Kredo.....	14
version bretonne du Kredo.....	15
10. Ar Bedenn Zul.....	16
11. Lid ar Hinnig.....	18
12. Prefas.....	20
texte intégral et musique.....	42
13. Sanctus.....	22
14. Pedenn-Veur.....	24
15. Salud d'ar Zakramant.....	25
15. Pater.....	30
16. Agnus Dei.....	37
ar gomunion.....	39
da gloza an overenn.....	39
Gloar da Zoue.....	40
Prefas ar Zul Ordinal.....	42

Voilà la TABLE du BREIZ A GAN N° 3

Avant ici ce qui est au répertoire de toutes les messes en langue bretonne, sans un large choix de mélodies nouvelles, nous pensons apporter une heureuse contribution à la constitution d'un indispensable répertoire de base, qui devrait enrichir encore dans les années à venir.

Quant aux SALMOU NEVEZ, ces cantiques et psaumes que l'on trouvait dans la première édition, nous avons dû, devant l'importance du présent recueil, les regrouper dans un autre livret : BREIZ A GAN N° 5

Lennadenn genta: Bezom mad ouz ar paour hag an den reuzeudig

PENNAD EUZ LEVR AR FURNEZ GAND Ab-SIRAH. (Eccl.3/32-34;4/I-II)

- 3/32 An den fur a ray d'e galon tehed diouz ar pehed,
hag e oberou mad a zougo frouez.
- 33 Gand dour e vez lazet an tan ha dre an aluzen e vez lamet ar pehejou.
- 34 An neb a respont d'e vreur,gand madoberou
a sonj er pezh en em gavo goude,
ha pa zigouezo dezañ kacud lamm d' e dro,e kavo skoazell.
- 4/I Va mab,diwall da naha e voued ouz ar paour
ha da lakaad daoulagad an ezommeg da hir-gortoz.
- 2 Diwall da lakaad da greski poan an den naonieg
ha da lakaad da vout c'hwero kalon an den ankeniet.
- 3 Diwall da vinima c'hoaz eur galon eet treñk ha da zalea rei aluzen d'ar paour.
- 4 Diwall da gas kuit eur hlasker-bara ha da drei da gein d'ar paour.
- 5 Na zistro ket da zellou diwar ar hlasker-bara
ha na ro ket da zen abeg da villiga ahanout.
- 6 Ma hoarvez gand unan bennag,en e enkrez,taoler e valloz warnout,
e Grouer a zelaouo e valloz.
- 7 Etouez ar bobl,kemer an tu da veza karet;
dirak ar mestr stou da benn.
- 8 Tro da skouarn da zelaou ouz ar paour
ha rent dezañ e zalud heb brasoni.
- 9 Diframm a dre zaouarn e wasker ar paour-kêz a zo gwasket
ha diwall da veza lent evid rei setañsou just.
- 10 Bez karantezuzevel un tad evid an emzivadad,
ha koulz hag eur pried evid o mamm.
- II Neuze e vezi par d'eur mab d'an Doue uhel-meurbed,
ha brasoh karantez eged eur vamm e-no evidout.

SAIM I45

7,8-9a ,9bc -10

Diskan : Ra vo kreñv or Feiz,beo or Harante,
ma skedo dreizom madelez Doue.

- 7 D'an dud a vez gwasket e rent o gwir,
d'ar re o deus naon e ro bara,
d'ar re 'zo er jadennou e ro frankiz.

SANT ERWAN,DIWALLER BREIZ

An Aotrou eo a ro sklerijenn d'an dud dall,
an Aotrou a laka sonn ar re 'zo krommet,
an Aotrou a gar an dud fidel d'al lezenn.

An Aotrou 'zo divenmour an dud estren,
skoazeller an emzivad hag an intañvez;
derhel a ra d'e bromesaou da viken.

lennadenn :Ar hristen a dle poania da lakaad da ren dre ar bed ar justis hag
ar peoh.

ADENN EUZ EIL LIZER SANT PAOL DA DIMOTE

2/I5-I6,22-26

ab karet

Laka da boan evid beza dirag Doue eun den brudet mad,
eur micherour didamall (pe: eun oberour^an'eus ket da ruzia anezañ),
leal pa ro da anaoud komz ar wirionez.

Arabad e ve ganez komzou goullo ha disakr;
dougenn a reont muioh-mui da goll ar feiz.

Tro kein da youlou fall ar yaouankiz,
ha klask ar justis,ar feiz ,ar garantez hag ar peoh
gand ar re a bed an Aotrou a galon vad.

Na jom ket da glask gouzoud muioh war draou sod ha diskiant;
ne sav nemed trouz diwarno.

Servicher Doue ne dle ket hegasi den ebed,
med beza mad e keñver an oll;
mad da gelenn,gouest da zoubla.

Gand douster,e tislavaro ar re a ve a-eneb,
rag fizianz e-neus e roio Doue dezo ar hras da jeñch buez,
da anaoud ar wirionez,
ha,deuet o rezon vad dezo,d'en em denna euz pejou an droug-spered
a zalh anezo chadennet dindañ e halloud.

D D'AN AVIEL

Meuleudi,Aotrou Krist !

Meuleudi deoh,Salver ar Bed !

Meuleudi,Aotrou Krist !

Ho Komzou a zo gwirionez bepred !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ

I2/32-34

32 Jezuz a lavar d'e ziskibien:

- N'ho pet ket aon,bandennadig va deñved,
rag plijet eo gant ho tad rei deoh ar Rouantelez.

33 Gwerzit ho tanvez ha grit aluzen gantañ,

grit evidoh yalhous ha n'eont ket da fall.

Dastumit eun teñzor ha ne 'z'aio ket da goll,

du-hont en neñvou,

eleh ma ne dosta ket al laer

ha ne vez ket ar preñved o krigna.

34 Eleh m'ema ganeoh ho teñzor,

aze ivez e vo ho kalon.

PEDENN AN DIGOR

Pedom !

Aotrou Doue,C'hwil ho-peus dibabet SANT ERWAN

da veza eur beleg entanet e galon,evid salvi an eneoù

hag evid divenn ar re baour; +

roit deom ho nerz hag ho kras, ni ho ped,

evid kerz war e roudou,o veza karantezuz eveldañ

hag evid e gaoud da alvokad dirazoh.

Dre Or Zalver Jezuz-Krist,ho Mab hag On Aotrou,

Doue beo ganeoh ha gant ar Spered Glan,

a oll viskoaz da virviken. R/ AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh,Aotrou Doue,selaou ho peleg santel ERWAN,

oh alvokadi evidom,dirag ho Santelez,

evid ma vo pardonet deom ar pehejou a dlefe tenna warnom ho kounnar

ha ma vim diwallet diouzh pep droug ha peb danjer.

DRE JEZUZ -Krist,Or Zalver.R/ AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan!


Resevet ganeom Sakramant ar zilvidigez, ni ho ped,Aotrou Doue,

da rei deom bepred,

ablavour da veritou SANT ERWAN ha d'e bedennou,


g grasou puill euz teñzor ho madelez. Dre Jezuz-Krist,Or Zalver. AMEN !

JEZUZ 'ZO DISKENNET




Je-zuz hor Sal-ver, Ni gred e gui-rio-ne E oh ar
Je-zuz hor Zal-ver, Ni gred e gwi-rio-ne Ez oh war

DISKAN



ao-ter Hag el den hag el Doue. Je-zuz zou di-chen-net
ao-ter E-vel den, e-vel Doue. Je-zuz 'zo dis-ken-net,



omb ar en ao-ter, A-do-ramb get res-pet Hun Doue lan a zous-ter.
dom war ab ao-ter, A-do-romb gand res-pet Doue a leuz a zous-ter.

2 - Gand karantez hep par
E halvit ar momant
Evid behi hon dar,
Evid terri hor o'hoant

2 - Ged un hireh hamp par,
E hortet er momant,
Aveid sehein hon dar,
Aveid torrein hor hoant.

3 - Penaoz e vad kredi,
Tostaad ouz hon Doue.
~~N'hon es gret med pehi~~
E-pad oll hor buhe.

3 - Mes penaoz hamp doujein,
Tostaad d'oh men Doue ?
N'hon es gret med pehin,
E-pad oll hor buhe.

4 - Salver karantezuz,
Resevit hon daseou.
Bet ouzom truezuz,
Pardonit hor faotou.

4 - Salver karanteüz,
Reseuet hon dareu;
Bet dohem trueheuz;
Pardonet hor faotou.

5 - Bremen Doue santel,
E fell deom ho karet.
Kentch, mil gwech mervel
Eged ober pehed.

5 - Bremen, O Doue santel,
E vennam hou karein;
Kontch mil gwech mervel
Aveid hos ofansein !

6 - Deut eta, va Jezuz,
Hep gortoz mui pelloh.
Rag ne vezom euzuz,
Nemed pa vem ganech.

6 - Deit enta, o Jezuz,
Ne hortet ket pelloh;
Rag n'um gavam euzuz
Nameid pen deom genoch.